

Son ar Pilliaouer

Ton anavezet.

Va zad en deuz va dimezet
Gant eur flerius pilliaouer (bis)
E Lokeffret ez eo ganet
E komantan Toulalaer!

Foei, foei, foei, va zammik aotrou,
Gant e stoup hag e billou !

Tri devez goude va eured
En em gav foar Landerne (bis)
Ha va lapous, prim dihunet
A zao meaz euz e wele.

Foei, etc.

Pa oa an hanter-noz sonet
En iliz vraz ar Fouille (bis)
Me oa intanvez glac'haret
Va unan barz em gwele.

Foei, foei, foei, etc.

Drailla ra eun hanter Pater,
Tana ra e gorn-butun, (bis)
Tapout a ra e grog pouezer
Evid mond var hent Sizun.

Foei, etc.

Gantan 'n em gav kamaraded
En eur vend da billaoua (bis)
E holl arc'hant en deuz fouetet
Ha tam pillou n'en devoa.

Foei, etc.

Mond a ra d'ar vilin baper
Gant eur sac'hadik pillou (bis)
Kalz buanoc'h eged eul laër
Rag preset eo an dellou.

Foei, etc.

Ha pa zistro d'ar gomanant
Raktal e sav eun tam kroz (bis)
— E pelec'h e ma da arc'hant ?
Me gred e maint en da gov.

Foei, etc.

Pa c'ha Iannik d'ar pardoniou
Bepred e ve mezo dall (bis)
Prest e oa da goll e vrugou
E Lokeffret an de all.

Foei, etc.

Pa zeuio ar c'hiz er vro-ma
Da derri an demeziou (bis)
Me a ielo en eur gana
Pell euz potred ar pillow.

Foei, etc.

Pa zeuio Karrik an Ankou
D'ober eun dro er vro-ma (bis)
Me ielo da laret d'ezan
Kas va fillaouer gantan.

Foei, etc.

Komzet vo d'an Aotrou Person
Deuz ar flerius pilliaouer (bis)
Vid ma kano al Libera
Hag ouspenn al Lib-e-rer.

Foei, foei, foei, va zammik aotrou,
Gant e stoup hag e billou !



Kanaouen an Durzunel

Ton anavezet.

Kalz amzer a meuz kollet
O furchal ar c'hoajou
Evid klask an durzunel
Kousket var ar brankou,
Devet a meuz va amors
Ha tennet a meuz fall,
Achapet an durzunel
Ha nijet er c'hoat-all.

Diouz an noz hag ar mintin
E klevan lapoused
O kana, o fredonin
Var vek ar gwe pignet.
Mez n'euz nikun aneze
Hag a bik ma c'halon
Evel mouez eun durzunel
O ouela d'he mignon.

Hirvoudi a ra noz-de
Gant ar boan, ar glac'har,
Evel eun intanvez paour
Kollet ganthi he far.
He mouez a zeu beteg d'in
Hag a zo glac'harus
Ha me da c'houlen ganthi
He foaniou truezus :

— Petra, turzunel iaouank
A dourmant da galon ?
— Kollet a meuz, emezhi,
Ma fidela mignon.

Ma na zeu eur chaseour
Da ober d'in meravel
Me varvo gant ar glac'har
Da va mignon fidel.

N'euz na souten na remed
Na konzolasion
Barrek da zond da galmi
Ankeniou ma c'halon.
Trec'het on gant ar glac'har
Mond a ran da vervel,
Mez na varvin ket kontant
Ma na varvan fidel.

Gwelet a meuz o vervel
An durzunel iaouank,
Dizec'het eo ma c'halon
Gant ar boan, an tourmant.
En he huanad diveza
He deuz c'hoaz lavaret ;
« O va gwir mignon fidel ! »
Raktal eo tremenet.

Melezour skler ha brillant
Euz ar fidelite
Te zo ar skuer ar gwirra
Demeuz ar garante.
Nan, na varvin ket kontant,
Ma na varvan fidel !
Birviken na zizonjin
Maro an durzunel.